


DANJERUZ ? TAMM EBED




$\frac{x^2 \delta x}{\partial q_1} =$
 $\sqrt[3]{\int \frac{d}{dt} \left[\frac{\partial}{\partial q} \left(\frac{x^2}{2} \right) \right]}$
 $- \cos \frac{\partial T}{\partial q_1} (4594)!!!$

DA
LAYARED EO
PED
LITRAD LEAZ
BEMDEIZ ?



B
R
U
D

N
E
V
E
Z



Strollad

Nº
14

Choariva Rougin

BRUD NEVEZ

KELAOUENN VREZONEG MIZIEG

N° 14 - EBREL 1978

Rener : Andreo Merser
Sekretour : Jakez Salaun

An oll lizerou ha skridou a zo da veza kaset da : BRUD NEVEZ, 6 ru
Beaumarchais, 29200 BREST.

Priz an niverenn-mañ : 12 lur

Koumanant-bloaz : - priz ordinal : 50 lur
- koumanant-skoazell : azaleg 60 lur
- studierien, soudarded : 30 lur
- liseaned : hanter-briz, 25 lur
- broiou estrañjour : 60 lur

Eur houmanant-bloaz a dalvez evid 10 niverenn.

Ar chekennoù-bank a zo da veza kaset war-eeun da : Brud Nevez, 6 ru
Beaumarchais, 29200 BREST.

Ar chekennoù-post a zo da veza laket war ano P.-M. Mevel, C.C.P. 1499-55
Roazon.

I.S.S.N. : 0399-7014

Disklêriet hervez al lezenn : Kenta trimiziad 1978.

C.P.P.A.P. : n° 34.627.

Ar merour : P.-M. Mevel

Moulet gand Ti-moullerez ar Martolod, er Gelveneg (Imprimerie du Marin,
le Guilvinec).

C. evid an oll bennadou.

N'eus ket a aotre d'embann eur pennad diwar Brud Nevez, heb beza bet an
aotre d'henn ober.

Ar skridou hag ar pennadou a vez embannet e « Brud Nevez », n'emaint ket
da veza laket war gont ar gelaouenn heh-unan, war gont ar re o-deus skrivet
anezo hebken.

Ar skridou ne vint ket embannet a vo kaset en-dro ma vez tu.

TAOLENN

- Strollad C'hoariva Plougin : Danjeruz ?... Tamm ebed ! Pez-c'hoari e 12 taolenn, skrivet
gand Mikael Madeg, ha kempennet gand ar strollad P. 3

LENNIT BRUD NEVEZ BEB MIZ

- « Brud Nevez nous paraît sur la bonne voie : les quatre premiers numéros nous ont donné de bons textes... Il lui faut se gagner de nouveaux lecteurs. Un objectif nullement déraisonnable, étant donné la qualité des premiers numéros et le talent de ses collaborateurs. » **Roger Laouénan, le Télégramme.**
- « Telle qu'elle est conçue, cette nouvelle formule donne à Brud Nevez une place à part dans le concert des publications en langue bretonne. Une place à part, et pas la dernière. » **Bernard Boudic, Ouest-France.**
- « Ar re a skriv e-barz n'ema ket o yez da zeski ganto... » **Barr-Heol.**
- « Une présentation nouvelle et très agréable... Un évident dynamisme... » **Breiz - Kendalc'h.**
- « Brud fait peau neuve et devient mensuelle... » **Yann-Ber Piriou, le Peuple Breton.**
- « Pennadou lennegel a-bouez... Bewech eun tañva euz buhez ar vro en amzer-vremañ... Eur brezoneg disi, pinvidig, hag êz da lenn. » **Bretagne-Aujourd'hui, les Cahiers du Bleun-Brug.**
- « La collaboration de bretonnants unanimement appréciés... Un breton vivant, d'une lecture facile pour tous... » **Le Breton socialiste.**
- « La variété et l'intérêt des textes... Les premiers numéros ont déjà révélé au public des auteurs nouveaux... » **Amañ Emgleo Breiz.**
- « Yaouankeet eo Brud, ha n'eo ket eun tammig... » **Bleun-Brug Feiz-ha-Breiz.**

Beb miz e vez da lenn e Brud Nevez : barzonegou ha kanaouennou, danevellou ha kontadennoù, peziou-c'hoari, studiadennou, nevezentiou...

Grit eun taol-êse : koumanantit evid eur bloaz, ha n'ho-po ket a geuz. Da 50 lur ema ar houmanant-ordinal evid eur bloaz. Kas an arhant d'ar CCP P.M. Mevel 1499-55 Rennes, pe war-eeun da Vrud Nevez, 6 ru Beaumarchais e Brest.

STROLLAD C'HOARIVA PLOUGIN

DANJERUZ ?...

TAMM EBED !

Pez-c'hoari e 12 taolenn
skrivet gand Mikael Madeg
ha kempennet gand ar strollad.

RAKSKRID

Ar pevare pezh-c'hoari aozet ganeom eo hemañ, hag an trede e brezoneg. Med er bloaz-mañ, avad, ez eus bet cheñchamant ganeom. Beteg henn, dre ma oa lod en on touez o-doa re a boan evid distripa ar yez en eun doare ingal, ha dre ma ne oa ket on leurenner eur brezoneger ampard kennebeud, e veze greet ar pleutradegou e galleg. Ouspenn-ze om bet paket berr an diou wech kenta abalamour d'an diouer a beziou-c'hoari e brezoneg. Brao eo kaoud c'hoant da c'hoari e brezoneg, med n'eo ket niveruz-meurbed ar peziou-c'hoari ! Red e oa bet deom neuze kemered eur pezh koz savet diwar-benn istor or parrez, evid ar wech kenta ha trei unan diwar ar galleg, evid an eil gwech.

Med a-benn ar fin ne zee ket re deom, beteg er bloaz-mañ on-eus bet c'hoant da aoza eun dra bennag a vije tostoh ouzom. Abaoe miz gwengolo 77 edom kroget d'en em voda evid klask sevel eur pezh. Or zoñj a oa er penn kenta c'hoari eur pezh diwar-benn an adlodenna. Med e gwirionez eo honnez eur gudenn diêz a-walh, ha didalvoud ive marteze e-keñver ar stourm. Dibabet on-eus neuze c'hoari eur pezh a vije kaoz deuz an nukleel ennañ.

Kroget om neuze da labourad dre eur pezh-c'hoari savet e galleg gand strollad ar VILTANSOU, deuz Konk-Leon : « La case de l'oncle Tom, ou Le cas de l'oncle Atom ». D'ar poent-se ive eo bet kinniget deom gand Mikeal MADEG eur pezh-c'hoari all, war ar memez danvez. Goude on-dije roet eun nebeud resisaduriou dezañ, e-neus kinniget eun destenn deom dindan miz pe zaou. Dre vraz om bet dedennet, nemed an destenn a oa kalz re hir. Neuze om kroget da bleustri war an destenn

heh-unan. Pell a-walh e-neus padet al labour-mañ, rag red eo bet deom kempenn ar pezh penn-da-benn. Cheñchet eo bet a-bez, koulz an doare c'hoari hag eul lodenn vad deuz ar homzou. Evid leurreni « DANJERUZ ?... TAMB EBED ! » om bet sikouret kalz gand Goulhan KERVELLA, a zo deut aliez a-walh evid rei lañs deom.

Dre vraz ez eus daou venoz braz barz or pezh, a zo liammet kenañ e gwirionez.

Klask a reom diskouez penaoz e hell galloud Pariz lakaad eur bobl da zond da veza sujed outañ. Dibab a ra Pariz mevelien, an depute, da skwer, evid gelled beza mestr war dud eur vro, ha dre ze ober pezh a gar ganto.

Neuze e teu an eil menoz : Pariz a gas er vro-ze eun doare beva nevez, eur gevredigez o « koñsomi muioh-mui ». Ezommou nevez a deu bemdez, a lak an dud da vond da zod. Ha pa deu an diouer a energiez emaint paket, hag e tigemeront heb soñjal muioh pezh a vo kaset dezo gand Pariz : eur greizenn nukleel.

Beteg ma vo eun nebeud oh en em skiantaad, hag e krogo neuze ar bobl-ze da zavel, da ober an « dispah » evid beza mestr war he bro, ha da ziskouez ne fell ket dezi digemer ar greizenn.

STROLLAD PLOUGIN

AR C'HOARIERIEN

C'hoariet eo bet ar pezh-mañ gand :

Biel Apostolik : Yann-Loeiz An Aod.
Ar vamm : Anni Terrom
Biel Politik : Reun Treger
An ijinour : Mikael Konk

Plah an tele : Jizel Tomaz
Mevelien Bariz : Berhed Konk
Sesil Bihan

C'Hoarierien ar mim : Rozenn Milin
Mikael Konk
Berhed Konk
Sesil Bihan

Tud ar vro : Annaig Konk
Martinn Ar Rest
Daniel Pochar
Rozenn Milin
Anni Terrom
Yann-Loeiz An Aod
Berhed Konk
Sesil Bihan
Youenn Apere

Mouez ar radio : Jizel Tomaz
Mouez Pariz : Bernez Killien

Trugarez braz ive da G-Kristen Foesnon evid beza greet skritell ar pezh evidom, ha da Nono evid poltred Biel Politik.

TAOLENN GENTA

War al leurenn ez eus eun nebeud taoliou a ra e-giz eul leurennig all. Eno ez aio an notabled, a zo al liamm etre Pariz (eur vouez nemetken) ha tud ar vro, a vezo an traoñ. A-raog ma krogfe an traou e tremen unan war al leurenn gand eur bannell skrivet 1948 warni. En deñvalijenn e krog an traou, gand muzik. Ar goulou a deu a-nebeudou.

Gweled a reer da houde eur beleg soutanennet o pourmen war al leurenn, monedone gantañ, tres nehet. Diou blah yaouank, er zal, e-touez an dud.

Ar plah kenta :

E ! Marian, gouzoud a rez piou eo hennez ?

An eil plah :

Biel Apostolik eo. Mevel an Aotrou Doue war an douar.

Ar plah kenta :

Aa... (eur pennadig)... Peseurt terzienn a zo krog en e reor ?

An eil plah :

Abalamour ema ar pezh-c'hoari o vond da gomañs; er vro-mañ eo Biel Apostolik a gustume soñjal evid toud an dud. Med erru eo war an oad. Nehet eo defod gouzoud piou a hello soñjal en e blas pa vo eet kuit.

Ar plah kenta :

Ha ar re all, neuze, ne zoñjont ket ?

An eil plah :

N'o-deus ket amzer, anad dit, gand al labour ez-éus da ober. Kalz èsoh eo d'an oll kaoud eun den evel Biel da soñjal evidom-ni toud. (Trouz kloh eun nor; antreal a ra eur vaouez a 50 vloaz. Mond a ra Biel d'he gweled ha da starda he dorn).

Biel Apostolik :

Ne fell ket dezañ, diouz pezh am-eus klevet ?

Mamm :

Feiz, gwelloc'h goulenn digantañ war eeun. (O hervel). Kenta ! (Dond a ra eur paotr yaouank war al leurenn).

Biel Apostolik :

Hemañ eo Kenta ?

Mam (lorh enni) :

Ya !

Biel Apostolik :

Ha ne fell ket dezañ ! (d'ar paotr, en eun doare rust) : Ata, va niz; petra 'glevan gand ho mamm ? Ne vefeh ket prest da gemer va flas ? Ha petra zo kaoz ?

Kenta :

Eur vicher vad am-eus; ha neuze e fell din dimezi.

Biel Apostolik :

Dimezi ! ar re yaouank ne zoñjont nemed en o flijadur. Ha peur e vefe greet an dra-ze ?

Kenta :

E gwirionez eo greet dija.

Mamm (o selled ouz Biel) :

Petra 'm-oa lavaret deoh ? (Kenta a za kuit).

Biel Apostolik :

Hag Eil ?

Mamm :

Feiz, eur spered kaer a zen eo, avad, med re droet war e studiou.

Biel Apostolik :

A zo eun dra vad, eveljust, med petra 'ma o studia ? (*Eil o tond wañ al leurenn*).

Eil :

Me ne rin ket, yantao !

Mamm :

Petra ne ri ket ?

Eil :

Ne'z in ket da veleg. Traou plijusoh a zo da ober, ha n'eo ket paeet mad a-walh evid al labour a vez. (*Mond a ra kuit*).

Biel Apostolik :

Mad va c'hoar, ne ouezan ket petra zo o c'hoari gand ho pugale. Eun druez eo soñjal ne fell ket d'ar re yaouank sikour ar re goz. Ha da beleh ez aio ar vro-mañ ma n'ez eus den ebéd da zivenn anezi ha da heñcha an dud vad a zo o chom enni ? Dipituz e kavan, war-lerh an deskadurez a-feson a zo bet roet da va nized.

Mamm :

Chom a ra Trede.

Biel Apostolik :

Trede... Hirroh e vleo eged e skiant.

Mamm :

O klask sikour ahanoh emañ, 'ta toud ! Gwir eo n'eo ket ken barreg hag an daou all, med bolontez vad e-neus, ha gouzoud a ra ar mod da veza gwelet mad gand an oll.

Biel Apostolik :

A zo eun dra vad eveljust.

Mamm :

Ha neuze on nehet va-unan diwar e goust, rag ne welan ket da betra kas anezañ. Da vedisin n'eo ket gouest da vond, hag e vreur Kenta a vezo dizale. Eil a zaio da noter, setu e hellim beza dizoursi diouz an tu-ze ive... Hag evid lavared ar wirionez e vefe eun dizenor da unan euz on familh, ha pa vefe ganet da zadorn da noz, rankoud diskenn euz e renk.

Biel Apostolik :

Gouzoud a reoh mad eo re zod evid mond da veleg. Biskoaz n'e-neus gellit deski eur frazenn latin penn-da-benn.

Mamm :

Selaouit, ma breur. Me zo' vond da lavared deoh ar pezh a zofij meur a hini er vro-mañ. Ar relijion zo foutu, pouez ar skolaerien zo echu. Ho soutanenn a lak ar re yaouank da c'hoarzin. Ha pa'z eoh da gaozeal euz politik er gador zermon e vez ar re yaouank e foñs an iliz o konta ped gwech e lavaroh : « Va breudeur ha va c'hoarezed kristen ». Ha pep tro e kavoh eun difeson bennag o lavared : « Sellit ouz va hoñ ha grit pinijenn. » !

Biel Apostolik (o selled ouz e gov) :

Alato ! treutaet eo din abaoe m'on bet e Vichy.

Mamm :

N'eo ket se, Biel. C'hwi zo erru koz, ha me ive. Ha neuze an devez hirio, o-deus ar merhed ar gwir da voti. Trede n'eo ket eur paotr divalo kennebeud.

Biel Apostolik :

Ta, med sod eo.

Mamm :

Ha neuze ? En devez hirio, n'eo ket red beza beleg evid ober politik; ober raio pezh a garo gand an dud, gand ma vo desket mad e vicher dezañ.

(*Trouz er pellgomz war don Ar Marseiez. Mamm ha Biel en em lak d'ar « gardavou ». Klevet a reer Mouez an aotrou Pariz*).

Pariz :

Ha kavet eo piou a gemero ho Plas ?

Biel Apostolik :

Dizale vo, ya.

Difrez ar mekanik, mouezig sklintin, e-giz eun ostizez karr-nij.

Mouezig :

Displegit sklerroh ho respont. An ordinateur ne gompren ket mad.

Pariz :

Ha kavet eo piou a gemero ho plas ?

Biel Apostolik (nehet) :

Ya !

Pariz :

Ano !

Mamm (da Viel) :

Deoh da gaozeal !

Biel Apostolik :

Eu...

Difrez ar mekanik; ar memez mouezig.

Mouezig :

Displegit sklerroh ho respont. An ordinateur ne gompren ket mad.

Pariz :

Ano !

Biel Apostolik :

Klujar.

Pariz :

Ano badez ?

Biel Apostolik :

Trede (*pennadig*)

Pariz :

Kavit eun ano all.

Mamm ha Biel Apostolik :

Eun ano all ?

Biel Apostolik :

Kredabl ne gav ket brao; ro eun ano all.

Mamm :
Peseurt ano an diaoul, a gav dit ?

Biel Apostolik :
Ne ouezan ket, me ! Da vab eo, a-benn ar fin, ha pa vefe ganet da zadorn da noz...

Pariz :
Ano ?

Mamm ha Biel Apostolik (nehet) :
B...B...B...Biel Politik !

Pariz :
Meuleudi deoh peogwir oh mistri war ho pro. Roet eo deoh ar vedalienn chokola trede klas gand pistach ha kokakola.
Evid an eleksionou da zond e ranko Biel Politik beza anvet.
Ar gwir e-no da brometi forz petra a vo goulennet digantañ.
Echu. Sinet : Pariz orapronobis mestr an oll. (*Trouz Marseiez*).

Mamm :
Echu eo ?

Biel Apostolik :
Ya, me gav din eo poent da Viel Politik en em gaoud.

Mamm :
Trede !

Biel Apostolik :
Tttt ! Biel eo e ano diwar-vremañ !
Dond a ra Biel Politik Trede, eur pez ticheurt skrivet B.P. warnañ, gand eur short, hag o suna eur vazig.

Biel Politik :
Devez mad deoh, toñtoñ Biel.

Mamm :
Va mab, galvet out bet gand on mestr braz Pariz orapronobis, mestr an oll.

Biel Politik :
Ya, ma mamm (*en eur ober ar jestr « toujours prêt »*).

Mamm :
Prest out da respont ?

Biel Politik :
O ! kredabl braz ya. Petra zo d'ober ?

Mamm :
Biel, peogwir eo Biel da ano diwar-vremañ, a-benn miz e vo ar voterez; a-benn miz e vezi depute. A-benn miz e ranki lakaad eur bragez hir. Lavar mersi d'az toñtoñ.

Biel Politik :
Mamm, petra eo eun depute ?

Mamm :
Eun depute a zo eun den a gustum gwiska eur bragez brao hag eur gravatenn. C'hoant az-peus da gaoud eur gravatenn ?

Biel Politik :
Mar deo ingal ganeoh, e kavjen gwelloc'h mond da zifoupa neiziu brini gand Per an ti all.

Mamm :
A ! Nann, n'eo ket ingal ganin ! Eun depute n'eo ket poent dezañ c'hoari gand al laboused bihan.

Biel Politik :
Mad, mond a rin da zepute, neuze.

Mamm :
Deom da weled ar gemenez, neuze, evid ober eun abid dit. (*Mond a reont kuit*).

Plah 1 :
Petra eo eun depute ?

Plah 2 :
'Peus ket klevet anezo ? Eun den a gustum paea banneou d'an dud da houde an overenn.

TAOLENN 2

Lahet eo bet ar goulou. Pad ar heit-se 'z eus bet lakaet kadoriou war al leurenn, a bep tu d'al leurennig. Dond a ra an dud da azeza, evid eur vodadeg publik eleksionou. Ar re na gavont kador ebed a za da azeza er zal. Dond a ra Biel Politik, gwisket eun abid nevez gantañ. Pignad a ra war al leurennig; an dud a strak o daouarn, hag a huch forz pegement : Bi...el ! Bi...el !. Bep tro ma lavaro eun dra bennag e vo cholori gand tud ar vro. En eun tu deuz al leurennig ema Biel Apostolik, gand e vaz, azezet war eur gador, a roio aliou da Viel Politik.

Biel Politik :

Va breudeur ha va c'hoarezed kristen (Dirolladeg mouezeiu. Jestrour a ra evid plênaad an traou). Ma vin depute deoh, am-mo eur gravatenn gand va zad. Setu, votit evidon ! (Dirolladeg).

Unan :

Ale, Biel, diskouez deom pez a ouezez ! (Kuzuliadeg etre Biel Politik ha Biel Apostolik)

Biel Politik :

Deg vloaz zo, virgule, e oa kaled ar vuhez amañ. Bremañ avad, ez om eet war-raog. Prest edo ar vro da goueza en toull a oa dirazi. Bremañ avad, on-eus greet eur paz war-raog. (Dirolladeg. Ober a ra eur paz war-raog, ha ema war boent pilad).

Unan :

Gisti ! hemañ e-neus desket kaozeal yañ ! (da viannañ)

Biel politik :

Va labour kenta, prometi a ran deoh, a vo digas endro ar justis, an emgleo etrezoh, hag ézamanchou ar vuhez hirio. (Dirolladeg).

Unan :

Mad eo, Biel, med penaoz e ri ?

Biel Politik :

Evid tenna profid deus douar an oll, avad, e vo greet henchou goudronet da vond beteg an oll foenneier hag an oll barkeier. Ne vo kemm ebed etre ar re vraz hag ar re vihan. An oll a hello mond beteg kement tamm douar o-deus heb mond dre ar pri hag ar fank. (Dirolladeg).

Unan :

Ha piou a baeo, Biel ?

Biel Politik :

An neb en-devo c'hoant da gaoud a ranko paea eveljust. Med roet vo deoh evid netra plakennou ha pannellou brezoneg ha galleg da vond d'ho touareier. Evel-se e vo echu ar poent ma'z ee on tud koz da goll, en noz evel en deiz, en eur vond euz eur foennog d'eben. Diwar-vremañ, gand eur gartenn vad e kavint o hent dioustu gand toud ar pannellou a vo. (Dirolladeg, baz Biel Apostolik war divesker Biel Politik - kuzuliadeg)... Med muioh a ginnigan deoh e gwirionez.

Unan :

A ya, Biel. Ha petra ginnigez deom neuze ?

Biel Politik (nehet) :

Eu... Petra ho-peus c'hoant da gaoud, mad a-walh ?

Unan :

Petra out prest da rei deom ?

Biel Politik :

Eu... (kavet gantañ) Deoh da houlenn. Va sekretourez a skrivio toud. (O tiskouez eur zekretourez n'ema ket war al leurenn). Mod-se, ne vo ankounac'haet netra, na den ebed. (Pep hini d'e dro a zavo euz e gador evid goulenn eun dra bennag, sañset, med ivez evid en em ziskouez d'ar re all).

Unan :

E ! Biel, torret eo ar radio er gêr...

Unan all :

Va mab e-neus c'hoant da vond da gosmonot...

Unan all :

Va merh-me a zo o klask an hent da vond pelloh...

Unan-all :

Debret e vez va fiz bihan gand ar filiped...

Unan all :

Mamm-goz he-deus kollet tri dant abaoe bloaz...

Biel Politik (nehet) :

Mar plij, mar plij, eun tamm pasianted, ha pep hini d'e dro. Ar merhed da genta.

Unan :

Mamm-goz a-hont, ne oar ket petra ober war an deiz. Inouet-mar e vez.

Biel Politik :

Moienn vefe sevel eur hlab re goz, dezo da zeski judo ha karate. Mad-krenañ eo evid an eskern. Va sekretourez a renko pep tra.

Unan :

Dihunet e vezan gand moh an amezeien o krial en noz; kredabl ed yen dezo gand an avel a zo.

Biel Politik :

Goulenn a rin digand eur marhadour kamping gwerza dezañ seier kousked war hanter briz; ped a voh e-neus hoh amezeg ?

Unan :

Tri mil.

Biel Politik (d'e sekretourez) :

Skrivit : mil pemp kant sah-kousked.

Unan :

Perag ne vefe ket tri mil ?

Biel Politik :

Evid kaoud anezo evid hanter briz.

Unan :

E ! Biel !

Biel Politik :

Ya !

Unan :

Red eo dit ober eur brezegenn deom, eun tamm diskour, kea ! Eun depute a rank beza gouest da zispaka prezegennoù kaer,

mod all n'eo ket eun depute mad.

Biel Politik a zo nehet; selled a ra ouz Biel Apostolik; hemañ a heje ziouskoaz hag a ra sin dezañ mond war-raog.

Unan :

Ale, Biel, gra eur brezegenn !

Biel Politik :

Eur... prestig e rin. An oll o-deus lavaret petra o-deus c'hoant da gaoud ? (*Selled a ra*). Ha te ? (*diskouez a ra eur verh vihan*), n'az-peus lavaret netra. Peus ket c'hoant da gaoud eun dra bennag ?

Plahig :

N'am-eus ket droed da voti; re yaouank on.

Biel Politik :

O, med eun depute zo e servich an oll. Ha neuze, ma kerez, az-po ar gwir da voti ivez. Kontant out ?

Plahig :

Ya, med petra eo voti ?

Biel Politik (nehet) :

Petra eo ? Feiz ! Gouzoud a rez lenn memestra ?

Biel Apostolik :

O !... honnez a zo bet er skol laik, sur !

Plahig :

(*O respont da Viel Politik*) : Ya !

Biel Politik :

Mad. Pa vo ar poent da voti e laki e-barz ar voest eun tamm folienn gand va ano warni. Setu petra eo voti. (*Dirolladeg*).

Unan :

Deut eo ganez, Biel !

Unan all :

Red eo deski ar re yaouank abred !

Unan all :

Ale, Biel, da brezegenn.

An dud :

Bi-el... Bi-el... Bi-el...

Biel Politik :

Eu... (*o furchal en e hodellou*). Aozet 'm-eus unan ! (*Dirolladeg*). (*O lenn e damm paper*) :

Ahanta, kenvroadezed ha kenvroiz,

An eleksionou a vo prestig a zo pouezuz-kenañ evid ar vro. Taolit evez a-raog voti ! Eveljust e komprenan mad ez eus lod ahanoh ha n'int ket plijet gand toud an diêzamanchoù o-devez en devez hirio. Med memestra, arabad deoh kredi e-barz kaoziou ar gandidated all, a-hend-all ez aio ar vro da goll dindan tri miz, ya... dindan teir zizun, ya... dindan tri devez, memez, ya.

« Diwallom mad, tud yaouank ha tud koz,

Euz ar gomunisted hag euz o zoñjou faoz ! »

Dalhit soñj kentoh euz pezh o-deus greet evidom Biel Apostolik ha tud Pariz. Red eo kendelher mod-se. Grit an dibab mad evid ar vro, evidoh ! Votit evidon ! » (*O renka e damm paper en e hodell*) : En eur ger : na ruz, na glaz, Breizad siwaz !

(*Dirolladeg*). Na ruz na gwenn, Gall penn-da-benn (*dirolladeg*). Na gwenn na ruz, evom gwinn ruz. (*Dirolladeg*).

En eur lavared ar frazenn diweza e kemer eur voutailad gwinn ruz euz e balto hag e tiskouez anezi en eur huchal. An dud a dosta neuze, pep hini evid kaoud eur banne.

Unan :

Yehed dit, Biel, deut eo ganez !

Biel Politik :

Ha ne deoh ket da ankaounac'haad ar voterez disul da houde an overenn !

Lahet ar goulou.

TAOLENN 3

Devez an eleksionou eo: war al leurennig ez eus tri bakad braz a foliennou voti. War ar bannell, en a-dreñv, a-uz da bep pakad foliennou, e vo eur skeudenn vraz. Unan gand Biel Politik, ha diou all gand pikou goulenn; an dud a base dirag al leurennig, a gemero toud eur folienn a zo dindan poltred Biel Politik, hag a 'z aio da lakaad anezi er voest-voti, en tu all d'al leurennig. A-raog en em gavoud dirag ar pakajou foliennou e tremenont toud dirag Biel Politik, a stard o dorn dezo, hag a heñch anezo. Setu ma tigresko buan e bakad foliennou. Tremen a ra tud ar vro meur a wech, an eil war-lerh egile, ha buannoh-buanna, en eur lakaad bep tro eun tok pe eur gwiskamant disheñvel bennag. A-benn eur pennad ez eus unan yaouank a za da gemered eur folienn all. Chom a ra an dud sonnet, feuket, spontet. Dond a ra Biel Politik da weled.

Ar paotr yaouank :

Ha kaoh gand Biel !

Biel Politik :

Roit va boñjour da Lenin !

Ar paotr yaouank :

Ha'n ! Maro eo. (*Mond a ra kuit*).

Biel Politik :

(*Oh en em zoñjal*): Ma, drol eo. N'em-oa ket klevet e oa bet klañv memez !

Kregi a ra ar voterez endro, buannoh-buanna, hag a-nebeudou ez a ar goulou kuit.

TAOLENN 4

En deñvalijenn e krog an traou. Muzik ha radio brezoneg; eur vouez.

Ar radio :

Setu ar heleier e brezoneg : rezultachou an eleksionou; « marée blanche » e Bro-Leon. Biel Politik, eta, e-neus bet toud ar moueziou, nemed unan.

A-nebeudou emma deuet ar goulou endro; tud ar vro a zo azezet a bep tu d'al leurennig; ha Biel Politik a deu warni d'ober eur brezegenn. Dirolladeg gand an dud pa 'n em gav ha pa glevont rezultachou ar voterez.

Biel Politik :

Ya, toud ar moueziou am-eus bet, nemed unan ! Med gouzoud a ran deuz peleh e teu, honnez ! Ha setu, gweled a reoh Petra ran ganti !

(*Regi a ra eur folienn voterez gand fae. Dirolladeg.*)

Kenvroadezed ha kenvroiz, va breudeur ha va c'hoarezed kristen, va... va c'hoarezed ha va breudeur kristen, pa lavarín mad. Da genta e rankan trugarekaad ahanoh. Bennoz Doue braz deoh, 'ta, evid beza votet evidon ! (*Dirolladeg*). Prometi a ran deoh e rin va zeiz gwella toud evid digas labour er vro d'ar re yaouank. (*Dirolladeg*). Bremañ ma 'z on depute, bremañ m'am-eus eur bragez nevez hag eur gravatenn...

Eur paotr yaouank, er zal :

Kravatenn va reor !

Biel Politik (feuket) :

Kleved a ran en ho touez mouez ar goñtestasion o sevel ! Eun dañjer a zo e teufe lod euz ar re yaouank, lod zo am-eus anavezet mad va unan pa oan er skol, da veza gochisted pe me oar-me. Dalhit soñj atao euz ar frazenn goz : « pedom Doue ma roio d'an dud labour yraz ha d'an depute nerz da zoñjal en o flas. » Amen ! (*Choléri*). Setu, evid trugarekaad ahanoh em-eus pedet aktourien vrudet euz a Roazon, hag a c'hoario dirazom eur pez-c'hoari ijinet gand... (*Goulenn a ra gand an aktourien, a zo en traoñ al leurennig : unan pe zaou a respont*)

Aktourien :

Krokodil Antitetanik !

Biel Politik :

(*O lavared endro*) : ijinet gand « Krokodil Antitetanik »... Diskouez a raio deoh na pegen diêz, na pegen poaniuz e oa ar vuhez gwechall. Ha nag a jañs on-eus da veza bremañ war hent ar zivilizasion hag an evolusion !

Ano ar pez, me gav din, a zo ????

(*Eun aktour a zo pignet war al leurennig dija, a respont dezañ*) :

Aktour :

Devez an devezizou gwechall !

TAOLENN 5

Tra ma oa Biel Politik oh echui gand e gaoz, e oa pignet an aktourien war al leurennig, o saludi tud ar vro forz pegement. Gwisket int a hiz koz, paour-kenañ; kas a reont Biel Politik da bourmen. Ar gouleier a zo lakaet toud warno. Gourvez a reont, hag unan er zal a sko teir gwech evid diskouez emañ ar pezh o vond da gomañs. Ar pezh-c'hoari bihan-ze a vo c'hoariet en eun doare siñbolik kenañ, e-giz eur mim :

Eur familh eo, gand an tad, ar vamm, ar vamm-goz, hag ar bugel. Pep hini d'e dro a raio al labour-mañ-labour, en eur lavared eun nebeud traou, o tiskouez pegen poaniuz e oa ar vuhez gwechall.

A-raog ma komañsfe ar mim, e tremen adarre unan war al leurenn, gand eur bannell skrivet « 1918 » warni. Lavared a ra eun nebeud geriou evid prezañti ar pezh.

An tremener :

« Gwechall goz e Breiz-Izel, e oa kaled ar vuhez
An douar a oa kriz, ar mor a oa djdruez.
Bemdez er goañv, en hañv, e veze red poania,
Rag n'oa ket sur an den morse da gaoud bara. »

Da genta e sav ar vamm.

Ar vamm :

O ! tristidigez ! Va bugale da vaga,
Va moh da voueta !

Mond a ra-hi da horo ar zaout; sevel a ra an tad.

An tad :

Skuiz on ! Hanter dorret va hein gand al labour,
Ha koulskoude eo red din sevel adarre !

Mond a ra da lemme e falz. Sevel a ra ar vamm-goz.

Ar vamm-goz :

Ha me zo erru koz dija
Ha padal eo red din poania
Evid gounid va zamm bara !

Ar bugel :

Va zud-me a zo paour-raz
'Hellan ket mond d'ar skol, siwaz
Red din mond da zikour anezo
Pe e vehin skañdalet !

Mond a ra ar bugel da zikour goro ar zaout keid m'ema ar vamm-goz o tenna dour deuz ar puñs.

Ar vamm-goz :

O ! Yen an amzer, skornet va daouarn !
O ! Don ar puñs ha ponner ar zaill !

An tad :

Dizale vo savet an heol. (*Mond a ra da vedi*). Toud ar parkad
gwiniz a zo da veza trohet 'benn an noz !

Ar vamm :

O ! va merhig, nebeud a lèz hirio
N'eo ket gand an amann a vo

E hellin paea ar goumikêl.

Ar bugel :

Deom d'ar park bremañ
Evid sikour an tad.

Mond a reont da vedi ivez. Neuze ema ar vamm-goz o vond da walhi an dillad.

Ar vamm-goz :

Pegen ponner va basin !
Nag a zillad da walhi !
Nag a boan war an tamm douar-mañ
A-raog gounid ar baradoz !

Ar vamm :

Red eo deom dastum gwiniz a-walh
Evid beva ar familh beteg ar bloaz a zeu.

An tad :

Ale ! buan bremañ ! Poent deom sachal !
Labourom stard a-raog ma teufe ar glao !
*Neuze e komañsont labourad startoh-starta, buannoh-buanna,
beteg ma kouezint toud, pep hini d'e dro, a-nebeudou, maro
gand ar boan. Neuze vo sklerijennet al leurenn a-bez endro.
Sevel a raio an aktourien, hag e saludint, adarre, en eur vond
kuit. Dirolladeg gand an dud.*

TAOLENN 6

Tremen a ra adarre war al leurenn eur paotr gand eur bannell « 1948 ». Dond a ra Biel Politik war al leurenn ivez. Kregi a ra da cheñch doare ar vro.

Biel Politik : ^{١٢}

Ma ! gweled a reoh pegen diêz e oa beteg-henn. Med bremañ m'ho-peus votet evidon avad, é vo digaset deoh deuz a Bariz êzamañchou ar vuhez hirio. Da genta, gand ar skol e helloh deski galleg ha kaoud deskadurez. Ha setu ar skol :

'Nem gavoud a ra daou zen, mevelien Pariz, gand eur voest vraz skrivet « SKOL » warni. Mond a reont da gerhad tud ar vro, evid lakaad anezo da dremen dre ar voest. Da genta eo unan goz.

Soaz goz :

O ! alato, ne 'z int ket ahe, e-barz, alato...

(Tremen a ra, bountet ma'z eo gand an daou all).

Ma ! quand même, j'ai appris quelque chose, hein ! Maintenant je sais le bon français !

(Da houde eo tro eur paotr).

Eur paotr :

(A-raog mond e-barz) Gast ! gast !

(En eur zond er-mêz) Putaingue, ma chèreu, (gand eur pouez-mouez marseieg).

Da houde, 'tremenont toud an eil war-lerh egile, buannoh-buanna, pep hini en e zoare.

TAOLENN 7

Dizroet eo an dud d'o flas. Biel Politik er hreiz.

Biel Politik : ^{١٢}

Mad, bremañ ma ouezoh galleg, bremañ ma'z oh sivilizet, ez eus moaienn da labourad siriuz. Bremañ eo red deoh moderniza ho tiegeziou hag ho tiez. Red eo deoh-toud kaoud dour red hag elektrisite.

Unan :

Petra eo ar machin-ze, al lubrisite ?

Biel Politik :

An elektrisite a roio tro deoh da ober diboan eur bern traou a regh gand kalz a boan en devez hirio : troha ho paro, lenn ar hazetennou, ober maionez. Gand an elektrisite oh eun den modern. Piou 'neus c'hoant da gaoud elektrisite ?

An dud a zav o biz, an eil war-lerh egile. Dond a ra unan euz mevelien Pariz a ro beb a faturenn dezo.

Unan :

Hein ? Kement-se e koust !

Biel Politik (dezañ) :

Cht !

Unan all :

Memestra eo ker !

Biel Politik a za dezañ hag a ro eur madig dezañ.

Biel Politik a strak e zaouarn, hag e teu neuze an daou vevel gand euz peziad boest, leun a draou e-barz. Pignad a ra Biel Politik war eur gador, e-kichenn ar voest. Neuze e kinnigo eur bern traou d'an dud, hag ar re-mañ a dosta toud, hag en em zikanint evid kaoud ar muia draou posubl, krog eur seurt « frénésie » en o reor.

Biel Politik :

Mad, piou 'n-eus c'hoant da gaoud eun oto ?

Unan :

Petra eo an dra-ze ?

An daou vevel a ziskouez penaoz e vez greet gand eun oto, pep hini eur rod-stur en e zaouarn.

Biel Politik :

Piou 'no unan ?

Toud emaint tro-dro dezañ, o klask paka unan. Hag e c'hoariont ganto pad eur pennadig. Da houde-ze, Biel Politik a ro eun taol c'hwitell, hag an dud a zelaou.

Biel Politik :

Eu... Piou 'no eun telefon ?

Unan :

Petra eo ?

Biel Politik :

Mad, selaouit ! *(Biel Politik a ra sin da unan euz ar vevelien diskouez petra eo. Kaozeal a reont neuze e-barz).*

Alo, c'est bien vous ?

Mével Pariz :

Alo, oui, c'est bien moi ! C'est vous ?

Biel Politik :

Mais oui, comment ça va ?

Mével Pariz :

O treize bien. Et vous ?

Biel Politik :

Ça va bien aussi !... Bon... Au revoir alors !

Mével Pariz :

Au revoir.

Biel Politik :

Gweled a reoh pegen plijuz eo ! Med eveljust, ne helloh ket kaozeal e brežoneg e-barz ! Ale..., piou 'no eun telefon ?

Nemez cholori adarre. Ha pa 'n-eus bet pep hini e bakad, ez eont toud da azeza war « penn dirag al leurenn », en eur renkennad, fas d'an arvesterien. Lakaad a reont o fakajou etrezo, an eil war horre egile, evid ober mogeriou d'en em zispartia, hag e c'hoariont, pep hini gand e draou. Komañs a ra e-giz-se ar perhentiez prevez.

Biel Politik :

Bremañ, evid ésaad al labour-douar, eun trakteur. Piou 'no eun trakteur ?

(Toud e lavaront « Me ! me ! », hag ez eont da gerhad unan. Memez cholori).

Eur mekanik evid goro ar zaoud ?

(Memez doare, memez cholori. Bremañ e kinnigo Biel Politik traou zod pe traou fall. Hag ez aio buannoh-buanna ar jeu, giz ma vije eet an dud da zod).

Eur mekanik torcha fri ar vugale ? *(Memez mod, memez cholori)*

Gwelloh c'hoaz ! Eur mekanik da skriba laou ! *(Memez mod, memez cholori)*

Ha bremañ an dra gaerra toud : ar post tele !

Unan :

Petra eo an dra-he, ar post tele ?

Biel Politik :

Sellit !

Straka a ra e zaouarn, hag e teu daou vevel Pariz gand eur post tele. Biel Politik a za da zibakaja. Tud ar vro a zo troet ouz an arvesterien, setu ne hellont ket gweled an tele a zo a-dreñv, sañset. Med selled a reont dirazo, hag e reont giz ma wellfent ar pez a zo o c'hoarvez a-dreñv. Hag e-giz-se e vo beteg ar fin : an dud a « welo » traou a vo o c'hoarvez a-dreñv dezo.

Biel Politik :

(O lenn ar baperenn implij). Setu ar post tele ! Meur a jadenn a zo : ar jadenn genta !

(Lakaad a ra eur jadenn wir, hag e weler neuze eur plah e-barz).

Plah an tele :

« Warhoaz e veho glao braz hag avel war ar peb brasa deuz ar vro, hag e leh ne vo ket e vo brao an amzer. Ha ma ne vo ket brao e vezo divalo. Ha ma n'eus ket glao warhoaz, e veho eun devez bennag memestra ! » *(Mond a ra diwar-wel).*

Biel Politik :

(O lenn atao). Med eun eil chadenn ez eus ivez. (Hag e lak an eil chadenn : neuze e weler adarre plah an tele, gwisket en eun doare disheñvel).

Plah an tele :

Warhoaz e vo brao an amzer e peb leh er vro. Eun devez brao eo e vo. Setu e helloh mond da neuñ barz ar mor du.

Biel Politik :

(O lenn e baperenn) : Hag an trede, ar jadenn rejion kea !

Plah an tele :

(Lakaet he-deus eur hoef, hag e sav he biz evid gweled deuz peleh e teu an avel. Kaozeal a ra galleg gand eur sapre pouez mouez breton).

Demain, il y aura de la pluie. Et s'il n'y a pas de pluie, il fera beau. Et si vous avez envie d'être sûrs du temps qu'il y aura demain, vous n'avez qu'à attendre demain et vous saurez ! Bon, beñ, kenavo, hein !

(Mond a ra diwar-wel. Biel Politik, lorh ennañ, a grog endro gand e ginnigou).

Biel Politik :

Mad. Piou 'no eur mekanik evid beza euruz ?

Unan :

Petra eo an dra-ze : beza euruz ?

Biel Politik :

A ! setu eur goulenn mad ! Beza euruz a zo kaoud eur mask e-giz hemañ : pa'z oh laouen e ra mod-mañ, ha pa'z oh trist e ra mod-se.

Hag e tiskouez masklou a hell beza cheñchet o genou dezo, evid ma rafent eur mousc'hoarz pe eun êr skuiz. Memez mod, memez cholori adarre. Bremañ emaint toud war eul linenn dirag al leurenn, eur bern pakajou o tispertia anezo. C'hoari a reont gand o zraou, pep hini en e gorn, heb kaoud daremprejou gand an amezeien tamm ebed. Ar berhentiez prevez eo : pep hini evid e vutun !... Neuze ez a Biel Politik barz ar post tele; pad ar heit-se e tremen war al leurenn eur paotr gand eur bannell skrivet « 1978 » warni.

Unan :

Sell 'ta. Biel barz an tele !

Unan all :

Ha, hennez n'eo ket eur genaouog memestra !

Biel Politik (en tele) :

Hirio e vo brao an amzer. *(Laouennaad a ra an oll).*

Hirio e vo fall an amzer. *(Tristaad a ra an oll).*

(Dezañ e-unan) : E ! E ! mond a ra endro !

Hirio eo kerreet priz al lèz. *(Laouennaad a ra an oll).*

Mad ! A ! Bremañ m'eo modernizet ar vro, ez eus moaienn da veza euruz hag efeduz.

(O kaozeal gand eur mikro, e-giz ma vije eur haner pop.)

Daoust hag ho-peus c'hoant da veza euruz ?

An oll :

Ya !

Biel Politik :
 Daoust hag ho-peus c'hoant da veza efeduz ?
An oll :
 Ya !
Biel Politik :
 Daoust hag ho-peus c'hoant da voti evidon ?
An oll :
 Ya !
Biel Politik :
 Daoust hag ho-peus c'hoant da gaoud peb a oto ?
An oll :
 Ya !
Biel Politik :
 Eun tele ? (*Al lusk a za war unannaad ha war vuannaad*).
An oll :
 Ya !
Biel Politik :
 Al loto ?
An oll :
 Ya !
Biel Politik :
 Beza brao ?
An oll :
 Ya ! (*Laouen eo an oll dud bremañ*)
Biel Politik :
 Red eo deom produi ! (*Ardou eur haner pop barz ar mikro*).
An oll :
 Muioh-mui !
Biel Politik :
 Red eo deom koñsomi !
An oll :
 Muioh-Mui !
Biel Politik :
 Red eo deom beza a-unan !
An oll :
 Bez' ez om !
Biel Politik :
 Soñjal ar memestra !
An oll :
 Hag e reom !
Biel Politik :
 Senti atao !
An oll :
 Pegen brao !
Biel Politik a gomañs kana « Jezuz pegen brao eo Nerz an elektrisite ». Med a-greiz-toud ez a kuit ar goulou. Tamm elektrisite ebed ken !

TAOLENN 8

En defvalijenn ema an traou. War eur jestr drol ema chomet an dud, o hedal. Dond a ra trouz deuz Pariz : ar Marseiez. Neuze e tihun Biel Politik, hag ar re all ivez. Tud ar vro a bak beb a houlaouenn. Komañs a reont klemm, pep hini en e du.

Unan :
 Nondedie ! Petra zo o c'hoarvez ? Perag n'ez eus ket a houluou ken ?
Unan all :
 Gast ! Tri devez zo e oa pad ar match fobal gand an Arjañtin, ha bremañ pad ar western.
Unan all :
 Ha me 'm-eus boued da rei da va zaout. Penaoz e rin heb lubrisite ?
Unan all :
 Va moh bihan a bako riou ma ne vez ket digaset ar goulou endro !
Unan all :
 Alato, Biel, gra eun dra bennag ! Trist eo paea ken ker-ze an elektrisite ma n'ez ket moaienn d'ober gantañ !
Unan all :
 N'eo ket modou !
Biel Politik
(O kemered e bellgomz hag oh ober sin dezo da jom peoh) :
 Mar plij, mar plij ! Chomom sivilizet ! Chomom Frañsizien ! Chomit peoh ! (*O kaozeal da Bariz*). Alo, Pariz ? Poent eo deoh ober eun dra bennag evid va bugale vad. Dija e klevan ar goñtestasion o sevel abaoe m'eo bet trohet an elektrisite deom !
Pariz :
 Amañ Pariz O ! Rapronobis Mestr an oll. Dizale e vo roet elektrisite deoh endro. (*An dud o laouennaad*).
Biel Politik :
 Mad; ar henta ar gwella neuze. Arabad ober leueou ahanom memestra ! Eet om d'ho heul brao ha kempenn. Arabad deoh leuskel ahanom bremañ, avad ! Mod all e vo greet freuz. Stanket ar metro gand kaoh saoud pe eun dra bennag giz-se !
Pariz :
 Roet vo deoh an elektrisite endro, med red eo vo deoh sachha nebeutoh warnañ ! (*An dud a deu da veza trist*).
Biel Politik :
 Med...
Pariz :
 Ya. En ho pro n'ez eus ket a-walh a energiezh evid ma hellfeh padoud e-giz-se. (*An dud a deu da veza trist*).
Biel Politik :
 Me gave din e oa Bro-Frañs gouest da veva heh-unan. 'M-eus aon n'ez eus ket kalz a dra a hellfem ober, neuze ?
Pariz :
 Kavet on-eus eun doare nevez da gaoud elektrisite er vro forz

pegement. Eul lamm war-raog eo. An diskoulm d'an oll gudennou energiez. Elekrisite da zond er vro-mañ a veho greet diwar an atom. Setu e vo kaset deoh prestig eun den gouest, desket ha siriuz, eun ijinour, hag a zisplego pep tra deoh, hag a lako an traou da vale. Echu.
(*Laouennoh eo an dud*).

Biel Politik :

Ma ! (*Dond a ra ar goulou endro*).

An oll :

A ! Memestra !

TAOLENN 9

Tremen a ra war al leurenn ar paotr gand e bannell skrivet « 1988 » warni. War al leurenn, an ijinour o selled ouz ar gartenn. Eun den all a zo en e gichenn o tougen eur seurt taolenn vraz; emañ an ijinour oh ober jestrou. Pa vez an ijinour war al leurenn e vez eun tamm muzik heñvel ouz ar « musique de l'espace » a vez e filmou zo, trouz siñtetik, 'ta, med morse n'ez aio war greñvaad evel er fin toud, pa vo divlasket an ijinour. Dond a ra Biel Politik : souezet eo gand pezh a ra an ijinour, ha muioh c'hoaz dre m'eo masklet. Lakaet eo diêz peogwir ne wel ket anezañ, hag e loh da vond kuit didrouzig. Neuze eo gwelet gand an ijinour.

An ijinour :

Mmmmm !

Biel Politik (oh en em zoñjal) :

O ! Eu ! brao an amzer hirio !

An ijinour :

Ya, gand ma ne vo ket glao ! C'hwi, a gav din, a zo deuz ar vro ?

Biel Politik :

Ha c'hwi, kredabl braz, n'oh ket deuz an tu all d'al loar !

An ijinour (a ra eun tamm c'hoarz mikanig) :

Marteze e hellfen ober eun nebeud goulennou ouzoh, peogwir emaoñ deuz ar vro ! N'emaom ket pell deuz ar mor, amañ, eo ?

Biel Politik :

Pell ? O ! feiz, amañ emaoñ pemp kant metr dahoutañ; en tu all d'an dorgenn emañ.

An ijinour :

Pegen dudiuz ! pegen interesant ! (*Skriva a ra war e damm karned*).

Biel politik :

Petra ho-peus skrivet ? (*Oh en em zoñjal*).

An ijinour :

Skrivet 'm-eus (*lenn a ra*) : pegen dudiuz, pegen interesant.

Biel Politik :

Ya, eveljust; med petra ?

An ijinour :

Med... e vefem pemp kant metr deuz ar mor, amañ, eveljust.

Biel Politik :

E gwirionez eo eun dra vez gwelet aliez-kenañ er parreziou bord ar mor, kavoud lehiou a zo pemp kant metr euz bord an aod.

An ijinour :

Ya, eveljust, ya, med... lavarit din : ekonomiezh ar vro amañ, n'ez a ket re vad endro, a gav din ?

Biel Politik :

(*Displijet eun tammig*): O ! arabad deoh lakaad an traou falloh eged n'ez int !

An ijinour :

Nann, eveljust, med memestra he-deus ho parrez kollet an hanter euz ar re zo dindan tregont vloaz en eur ober pemp vloaz.

Biel Politik :

Ya, med plasou mad am-eus kavet dezo e-barz ar marin hag an arme. Unan bennag a zo eet da archer ivez. Setu n'eo ket re fall ar jeu memestra.

An ijinour :

Hag amañ, neuze, e kustum an dud voti mad, kea ?

Biel Politik (Oh hen em zoñjal) :

Eu, mad ? Añfin, ya, an dra-ze zepant, petra eo « mad » kea ! (O tistaga evel an ijinour). Dièz eo din lavared, kea, kar me eo an depute.

An ijinour :

Ah très bien, enchanté, pardon, eu, mad-tre. (O tenna eur geriadur euz e hodell, hag o selled outañ)... Entanet, (o starda e zorn)... sorset, hudet... (o sortial eur gartenn) : Je me présente Jean Dupont, ijinour chef an EDF evid rejion an Ekstrem West.

Biel Politik :

Opala !... C'hwi eo an aotrou gouest, desket ha siriuz deuet deuz a Bariz !

An ijinour :

Setu. Me gav din n'emaon ket pell deuz Begmoger amañ (diskouez a ra) : En tu-ze, ma ne fazian ket, en tu all (selled a ra ouz eur gartenn) deuz an... deuz an dorgennig, a-hont, ema Begmoger, ket ?

Biel Politik :

Eu, perag ? C'hoant ho-peus da vond di da weled ? E gwirionez n'eo ket eur horn brao, brao! ne vez morse den ebed eno, ha re zañjeruz eo evid mond da besketa, zoken. Deuit kentoh da weled chapel Sant Biel Apostolik, nevez savet ganeom, hag a zo komañset da veza anavezet e Bro-Leon a-bez diwar an oll viraklou a zo bet c'hoarvezet en he hichenn.

An ijinour (siriuz-kenañ) :

Meusieu Biel Politik, eun den siriuz on, ha c'hwi marteze, a zo ivez. En va harg ema Rejion an Ekstrem West evid an elektrisite. Goulennet ho-peus e teufen amañ hirio da gaozeal deoh diwar-benn an energiez nukleel. (An ijinour a ra sin d'ar mevel a zo deuet gantañ da lakaad pep tra en e blas).

TAOLENN 10

Displeget 'z eus bet seurt taolenn. An ijinour a zisplego d'ar bobl petra eo an energiez nukleel dre skeudennou braz. E vevel e jeñcho ar skeudennou. Biel Politik a zo aze ivez o selled. Kenta taolenn : eun daolenn chifrou o tiskouez an diouer a energiez e Bro-Hall.

Biel Politik :

Selaouit, selaouit mad, ar re vraz hag ar re vian, ouz pez eo deuet an ijinour brudet Jean Dupont da lavared deoh. Deuet eo « Meusieu Dupon » espres-kaer deuz a Bariz evid diskouez deoh penaoz e vo greet elektrisite azaleg bremañ. Eun doare nevez eo, hag a roio deom elektrisite forz pegement. Anvet eo... eu... penaoz dija...

An ijinour :

An energiez nukleel, pe energiez atomik. Setu, sellit ouz an daolenn :

Evel ma helloh gweled ez a fall-kenañ an traou e Bro-Frañs evid pez a zell an energiez. A-benn eun nebeud bloaveziou, ne jomo ket a-walh deoh evid gelled goro ho saout.

Kompren a reoh mad ne helleh ket chom e-giz-se heb ober eun dra dennag.

(An dud a zelaou, o daoulagad digor braz).

Ha neuze ez eus bet kavet eun doare nevez da gaoud elektrisite. Ma n'ez eus ket a-walh a zour ten, pe a betrol, ken, e raim gand traou all !

Biel Politik :

Ha tañpir evid an Arabed. N'o-doa ken nemed lakaad priziou izelloh.

An ijinour :

An energiez nevez a zo bet kavet a zo an energiez nukleel.

(Cheñch taolenn a ra).

Diazezet eo war faout an atom.

Biel Politik :

E brezoneg : an « atoum ».

An ijinour :

Eun atom (o tiskouez eun dresadenn) a zo e-giz eun aval, gand gwenan o trei tro dro heb ehana. Pa vez iset an atom, e tarz an traou : « terri » a ra e daou damm. Hag an dra-ze a ro eun nerz spontuz, an dra-ze a ro energiez.

An oll :

Aa !

Biel Politik (d'ar bobl) :

Ya, eveljust. (Med den ebed n'e-neus komprenet, eveljust).

An ijinour :

Rei a ra eun energiez spontuz med n'eo ket dañjeruz tamm ebed. (Ha pad ar heit-se ema ar mevel o cheñch taolenn, hag e tiskouez eur vombezenn o tarz. An ijinour a guz an daolenn-ze buan, en eur huchal war e vevel.)

(Taolenn 3) Setu eur greizenn !

An energiezh a vez greet e-barz kreizennou braz evel homañ : gweled a reoh eo brao-kenañ ! Eun energiezh nêd eo an energiezh nukleel. Ne ra ket a loustoni. Diwall mad a vez greet euz ar restachou uraniom. Setu n'ez eus dañjer ebed evid an den. (An dud a zo toud digor o genou hag o daoulagad, barnet).

(Taolenn 4 : kartenn Vreiz gand Begmoger lakaet warni).

En ho pro vo lakaet unan deuz ar re-ze da vale. Soñjit 'ta : nag ho-peus chañs ! Choazet oh bet etre eun deg bennag a lehiou all ! Amañ eo, e Begmoger, e vo greet ar greizenn, hag aze, vo lakaet ar restachou, barz ar mor. E-giz-se ne raint ket a loustoni ha ne vezint ket gwelet ! hag aze... (trohet).

Biel Politik :

Eu !

An ijinour :

(O koma 'ns beza inouet) : Ya.

Biel Politik :

Petra eo eur greizenn ?

An ijinour :

Eu ! Displega a rin an dra-ze deoh da houde. (Envolée lyrique) : Tudou, an energiezh nukleel a zo energiezh da zond ar vro, energiezh da zond ar bed, zoken. Ganti e hellim dizale ober pep tra. Kudenn ebed ken. Saveteet e vehim gand an atom !

TAOLENN 11

Eet eo an ijinour kuit, ha Biel Politik gantañ. An dud o-deus se-laouet didrouz ar brezegenn. N'o-deus ket komprenet kalz a dra, med gwelet o-deus oa an ijinour eun den gouizieg. N'ez eus nemed unan, eur vaouez koz, a zo kroget da zelled a-dreuz ouz an ijinour : Soaz Goz an hini eo. Sevel a ra Soaz, hag en em zispartia deuz tud ar bobl. Komprenet he-deus-hi e oa tud Pariz o trompla anezo, hag e krog da glask emskiantaad tud ar vro.

Soaz goz :

Genaouelen ! Prest oh da werza ho pro, da losker anezi da vond gand chas ha moh kratatenneg deuet deuz kêr. Prest oh da zenti heb lavared ger ouz kement urz a vezo roet deoh gand an estrañiour. Prest oh da gas ar vro d'ar maro ?

Unan :

O ! Soaz Goz, petra zo krog en da reor ?

Soaz goz

(Mond a raio euz an eil d'egile) : Daonet eo ar vro-mañ ! Daonet vezo gouenn bugale ho pugale ! Gwalhet piz eo ho taouarn, trohet brao baro ar baotred, flour daouarn ar merhed, med ne weloh ket emaint toud o trompla ahanoh ? Leueou ma'z oh ! Sklavourien oh deut da veza. Red deoh kaoud elektrisite, ha tamm energiezh ebed. Penaoz ober, penaoz ? ! Med êz eo : energiezh nukleel; hag a zo prop, hag a zo nêd !!! Aaaa... Pa'z eo ar maro eo e tigaso deoh ! ! Te, Marijan lagad bran, ne ouezez ket petra zo en em gavet en Irochima ?

Unan :

E peleh ema an dra-he ? En tu all da Raazon ?

Soaz Goz :

Irochima ? ! Ne ouezez ket ? (jestr) boum ! !

Unan all :

Petra ? ! (memez jestr) boum ? !

Soaz goz :

An dra-he ? ! boum ! ! (jestr)

Unan all :

O !

Soaz goz :

Ya, ya !

Unan all :

An dra-ze eo an atom ? ! !

Soaz goz :

Er bloaz pemp ha daou-ugent eo bet distrujet penn-da-benn Irochima, eur gêr vraz euz ar Japon. Ar vombezenn atomik a zo bet lakaet da darza he-deus lahet etre kant mil ha c'hweh ugent mil a dud.

Unan all :

Ha'n !

Soaz goz :

Ha te Matieu Nondechif, kavoud a ra dit e kavi labour er vro : gand ar greizenn-ze ? Gaou ! Eur greizenn ne zigas ket a labour.

Tud deuz Bro-Hall eo a deui. Deoh-c'hwi, tud ar vro, ne vo netra ! Netra nemed restachou ! Hag ar restachou-ze, lakaet barz ar mor, n'int ket dañjeruz, sañset. Med n'eus ket bet lavaret deoh ne vehint biken distrujet. A-benn deg mil vloaz ahann e vehint dañjeruz c'hoaz.

Hag ar hreizennou brao-ze, gouzoud a reoh pegeid e padont ? Ugent vloaz d'ar muia toud, pa valeont. Bemdez e vez ano deuz eur greizenn bennag hag a zo torret, pe deuz unan bennag lahet !

Ne gomprenoh ket n'eo ket mond war-raog eo a reom, med mond d'ar maro ! Poent eo deoh sevel beg ho fri, alato, ha n'eo ket chom da zelaou gevier ar re-ze !

Pad ar heit-se, o klevoud trouz, ema' deuet Biel Politik endro gand eun archer. Paka a reont Soaz Goz, hag e kasont anezi kuit.

TAOLENN 12

Krog eo an dud d'en em zarempredi. Kaozeal a reont endro. O soñjal er pez he-deus lavaret Soaz Goz. Med evid ar penn kenta ema' ar goulou war an ijinour, a zo o labourad. Da houde eo e veho gwelet tud ar vro oh en em skiantaad hag o sevel a-nebeudou.

Eur skabell 'z eus war al leurenn, hag an ijinour a deu hag a za, o rei urziou da dud n'emaint ket war wel, o pignad hag o tiskenn deuz e skabell, o vuzulia.

An ijinour :

Ar wezenn-ze a vezo diblaset pemp kant metr pelloc'h en douarou.

Ar patatez ?... O !.. D'ar moh, ha mad pell zo ! Ar pluskou patatez ? Evid ar Vretoned !

Ar menhir ?... Eur menhir ez eus amañ ? (*o sellad ouz e gartenn*). N'eus ket...

Piou a zo oh ober goap ouzin ?

Med eun hent amañ ya beteg el lanneier, en tu all.

(*Bremañ ne vo ket klevet an ijinour ken. Gwelet e vo oh ober jestrou, med ne vo ket klevet; tud ar vro eo a vo klevet.*)

Unan :

Petra ra hemañ dre just ?

Unan all :

O ! moarvad *ema* kroget da zevel ar greizenn nukleel.

Unan all :

Gast ! dija e kaven e oa cheñchet doare ar vro eun tamm brao, med *bremañ* 'vad...

Unan all :

Komañs a ran beza skuiz gand toud an afer-ze.

Unan all :

Ya, 'benn ar fin, pa zeller mad : petra neho digaset deom toud an traou-ze ?

(*O tiskouez ar pakajou*).

Unan all :

Gwir eo. Ha klevet ho-peus Soaz Goz. N'eo bet sod, ar pez a lavare.

Unan all :

Ta ! Hi eo an hini furra er vro. Hi he-deus gwelet kalz a draou en he buhez. Me gav din ema ar wirionez ganti.

Unan all :

Ya, gast ! Pa zoñjer : etre kant mil ha c'hweh ugent mil den lahet en eun taot !

Unan all :

Gisti sod : Ped den a zo o chom e Brest ?

Unan all :

Daou hant mil apeupre. Perag ?

Unan all :

Nondediou !

Unan all :

Med pa zoñjer mad, neuze eo marteze gevier toud, ar pez

o-deus ar re-ze, tud Pariz, kontet deom abaoe ar penn kenta !

Unan all :

Ya, sur eo zoken. Pa weler penaoz om deuet da veba : kaoz ebed ken gand an amezeien! pep hini evid e vutun. Ha klask beha atao modern ar muia posubl a lak ahanom da labourad heb kemered amzer da veva.

Unan all (o huchal hag o sevel) :

Me 'm-eus c'hoant da veva !

Unan all :

Ya, me ivez ! (o sevel d'e dro. An oll o komañs ober an dispah).

Unan all (o sevel) :

N'he-deho ket Soaz goz komzet evid netra ! Distrujom toud ar mohaj-se ! Poent eo deom kregi da huchal ! (En em lakaad a reont da zistruja ar mogerious pakajou a oa etrezo).

Unan all :

Ya, n'eo ket re ziwezad evid cheñch penn d'ar vaz !

Unan all :

Ar vro-mañ a zo deom-ni ! Deom-ni da gomz bremañ !

(Bremañ ema distrujet an oll vogerious, hag eun emskiant strollad a zo savet etrezo).

Unan all :

Bremañ ma welom skler, bremañ ma'z om asamblez endro, deom oll da weled piou eo hennez a ouie kement a draou, hennez hag a zo gouest ha desket, sañset.

Unan all :

Ya, ma ouezim, a-benn ar fin, piou eo hennez, a gustum kuzad e fas.

(Mond a reont etrezeg an ijinour, hag e reont eur helh tro-dro dezañ hag ez aint a-nebeudou war dostaad muioh-mui).

Unan all : (D'an ijinour a zo pignet war e skabell).

E ! te, perag e oa dañjeruz er Japon ha ne vefe ket amañ ?

An ijinour (o komañs strafuilla) :

Hañ ! Eu ! Eu !... Mez... Petra zo o c'hoari gand ar re-mañ ?

Unan :

Klevet on-eus kaoz deuz restachou, ludu uraniom, hag a zo dañjeruz.

An ijinour (strafuillet) :

N'eo ket gwir. Pa vez taolet evez braz, hag e helloh kredi e veho greet...

(An dud a gomañs heja ar skabell ha taoler an ijinour war an douar)

Biel Politik :

(Oh en em gaoud evid sikour an ijinour). Alo, tudou; an ijinour a lavar deoh n'eo ket ar memez tra evid ar broiou pell. Eñ a zo eun den deuz ar vicher ha ni n'om ket !

Unan :

Te, Biel, n'az-peus komprenet seurd ebed !

Unan all :

Poent eo dit klask unan bennag all evid soñjal en da blas !

(Pad ar heit-se ema pilet an ijinour. Daou zen a bak anezañ dre e zivreh, pep hini en eun tu.)

Eur verh :

Ha ñeuze, te hag a oar pep tra, te, hag a zo deuet deuz ne ouezan ket peleh evid rei urziou deom, gouezet vo a-benn ar fin piou out !

Divaskla a ra an ijinour. Eur penn maro eo. Spontet eo an dud, hag ez eont toud kuit, en eur skrija. Ar muzik a za war greñvaad. Biel Politik, o weled ar penn maro, a glask tehed ivez, med me hell ket, rag paket eo gand an ijinour a zalh anezañ etre e skilfou, o c'hoarzin en eun doare mekanik, kreñvoh-kreñva. Chom a raint aze, sonn ha difiñv war al leurenn, ken e vo lahet ar goulou.

ECHU

Ma n'ho-peus ket prenet c'hoaz

Karantez ha Karantez

GAND Naig Rozmor

setu amañ pezh e-neus skrivet A.T. er gelaouenn
« Dihun-Breiz » :

« N'on tamm ebed troet gand al leoriou barzonegou, ha ne daolan ket eur zell e-barz... Lennet am-eus « Karantez ha Karantez » heb ehan. N'eo ket plijadur hebken am-eus kavet ennañ, eun dra ouspenn, eun uhelled spered. Lenn hag adlenn am-eus graet, ha seul vui e lennen, seul vui e kaven kaer... Marteze, gras da Naig Rozmor, e lennin barzonegou bremañ... Nann, n'on ket troet gand barzonegou, koulskoude, eh alian lennerien « Breiz » da brena al leor bihan mañ... »

18 LUR + 2,75 LUR MIZOU-KAS
C.C.P. P.M. MEVEL 1499-55 RENNES

Ha prenet ho-peus

Lapous-den

Penn ar Bed

renket diwar saozneg J.-M. SYNGE
gand C'HOARIVA BREZONEG PENN-AR-BED

*Iwerzoniz, a lavare e damallarerien da Synge,
ne oant ket evelse...*

10 lur + 2,75 lur a vizou-kas

C.C.P. P.-M. Mevel 1499-55 Rennes.

Re yaouank Plougin, e Leon, eo ar pevare bloavez dezo da c'hoari pez. Ar wech-mañ, e-neus fellet dezo c'hoari unan hag a vije tost euz kudennou tud o bro. Daou venoz o-deus laket neuze er pez-mañ : diskouez a reont penaoz e vez klasket ober seurt a garer gand tud eur vro, ha peseurt roll a vez laket an dud e karg da c'hoari a-wechou evid se; diskouez a reont ive penaoz e teu bemdez ezommou nevez d'an dud : ha pa deu neuze an diouer a energiez, pa vez digaset dezo eur greizenn nukleel, e tigemeront anezi heb soñjal muioh. Beteg ma kompren ar bobl ha ma sav d'ober an dispah...

Un groupe de jeunes de Plouguin, dans le Léon, s'est lancé dans l'aventure du théâtre il y a quatre ans. Cette année, ils ont voulu jouer une pièce qui soit proche des préoccupations des gens, dans leur région. La pièce qu'ils ont adaptée d'après un texte de Mikael Madeg, a dès lors un double propos : démontrer comment le pouvoir cherche à dominer le peuple, et le rôle que peuvent jouer des notables à cet effet : souligner aussi les besoins croissants des uns et des autres, dans le cadre d'une société de consommation : tant et si bien que, lorsque survient la crise de l'énergie, l'on accueille sans réagir un projet de centrale nucléaire. Jusqu'à ce que le peuple, prenant conscience, se révolte...